

Nan, ne eller ket niveri
 Ar re zo dlecurien d'ezhi,
 Euz ho iec'het, euz ho danye,
 Hag ouspen c'hoas, euz ho bue,
 Nag a vurzudou, christenien,
 (Ne al ket an den ho c'homgren)
 E deus gret ar Verc'hez Vari,
 E lec'h-se ken caret ganthi!
 D'ar zul kenta a vis Gouere,
 Gand ar brassa solanite,
 E ve gret ato ar pardon
 E Confors gant devotion.
 Daoulinet neuze dirazhi,
 Oh ! pedomp, pedomp anezhi
 Da gaout sonch ac'hanomp ato,
 Dreist pep tra en heur hor maro.

PEDEN.

Guerc'hez Vari, hor Mam dener,
 Ni a zeu da dreid o'ch aoter,
 Evit pedi ho madelez
 Da gaout ouzomp bepret truez.
 Pa zoc'h refuch ar bec'herien,
 Plijet ganeoc'h deomp-ni obtén
 Digant Jesus, hor guir Aotrou,
 Pardon euz hen oll bec'hefou.
 Epad ma vimp var an douar
 En draonien-man leun a c'hlac'har,
 Grit ma vezimp dezan fidel,
 A deoc'h ive beteg mervel.

O Itron-Varia Gonfors;
 Hor c'honduit va ëon d'ar pors
 Euz an eürusdet eternel,
 Da velet an Dreindet Santel.

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 18 Jmii 1867.

EVARD, vic. gen.

Quimper, typ. Kerangal.

GUERS
EN ENOR D'AN ITRON VARIA CONFORS

TON : *Me ho salud stereden vor....*

PE : *Jesu, dulcis memoria....*

Meylaris, bezit leun a joa,
 Da gaout eur Chapel ar gaera,
 E peleac'h 'nem blij ar Verc'hes,
 O tiskuez e oll madelez.

Ia, er Chapel-se benniguet,
 A zo kement darempredet,
 E Confors, guir Vam hor Zalver,
 A scuil e gragou hep niver.

Eno biskoas den na bedas
 A greis calon, gant fizians vrás,
 Anez beza bet silaouet
 Gant Rouanez an oll Alet.


Ar vam-se ken doug a ker mad
 A ro d'ann oll diguemer vad,
 D'an den just ar berseveranç
 A d'ar pec'her an esperanç.

Obten a ra digant Doue
 Iec'het d'ar c'horf a d'ann ene,
 Hag e lec'h an dristidiguez
 E tigas laouenediguez.

Dirag Doue oll gallondee,
 D'ar re vûd e ro ar prezec,
 D'ar re zo bouzar ar c'hlavet,
 Couls a d'ar re zall ar guelet.

Ar re gam, ar re mac'hagnet,
 Goude beza Mari pedet,
 A zistro leun a joa d'ar guer,
 Eb caout mui ezom a vizyer.

Christenien eta, me ho pet,
 Mar claskit ar guir eurusted,
 Deut oll gant joa da gaout Mari,
 Evit goull sicour diganti.



Tadou ha mammou, c'hui pere
A hirvoud marteze bemde
Var eur verc'h, var eur mab diroll,
Dre ma zint goal skuer 'vit an oll.

Gouestlit anezo gant fizianç
D'an hini zo hon esperang,
Hi eo ar feunteun a vue
Hag a zilvidigez ive.

Hag e dorn leun a drugare
A zigasso ho pugale
Var an hent mad o deus collet,
Siouas d'ezo ! dre ar pec'het.

A c'hui pere zo er bed-man
Abandonet gant peb-unan,
Collet ganeoc'h ho tad, ho mam,
En eun oad c'hoas iaouankie flam.

Deut e'hui dreist oll emzivadet
Da dreid e aoter benniguet,
D'he fidi stard, pa zeo ker mad,
Da guemer trues euz ho stad.

Hag ar Vam-ze, leun a zousder,
Ho sicouro e peb amzer,
Mari bepred ho conforto,
A dious pep anken ho miro.

Tud iaouank m'ar fell deoch'ive
Kenderc'hel e servich Doue,
O practica ar vertuziou
Hag o tee'het dious ar viçou.

Savit ato ho taoulagad,
Etrezec ho Patronez vad,
A Guerc'hez an oll guerc'hezet,
Ho tivoallo dious ar pec'het.

Direxit ive, pec'herien,
Da gaout Mam an oll gristenien,
E divrec'h a zo digoret
Pell zo 'vit ho tiguemeret.

Oh ! pedit-hi a vir galon,
Hag o pezo graç a pardon :
Morse Jesus n'eus refiset,
Netra d'he Vam muia caret.

C'hui, Guerc'hez, zo eur bleinourez,
En hent euz ar zilvidiguez,
C'hui a ro ners e pep mare
D'ar beachour skuis o vale.

Var ar mor, a var an douar,
E creis an drubuill, ar glac'har,
Mari e peb lec'h a zifen
Ato e guir zervicherien.

An Itron-Varia Gonfors,
A zigas dizanjer d'ar pors
Ar martolod paour trubuillet
E creis ar mor bras couinaret.

Soudardet christen Breiz-Izel,
Ebarz en tan enz ar brezel,
Ho deus bet santet alies
An effet eus e madeles.

Rac-ze pa zistroont d'ho bro,
Goude m'int bet trech' d'ar maro,
Ho gueler o tont a vanden
Ha ganthro peh a c'houlaouen.

Da drugarekaat assambles,
Mari, ho madoberoures,
Da veza bet ho divouallet
Pa voant e riscl beza lazet.

Pet guech ne deus ket c'hoas mouquet !
Mari an tan goall fuloret !
Ato Mari a ro remed
Evit pep droue, e pep elenvet.

Mari deus ive dilivret
Cals a vroaguez a voa poaniet,
Hag obtenet digant Doue
Ar vadiziant d'ho bugale.